


AN DAOU VAOUT

Allegro.



Maout ar Gô ha maout ar Gall En em



dour-tas e'n deiz all, Hag e la-va-re ar



Gô : « Sell va maout pe-naos e sko ! Hag ar



Gall a la-va-re : Sell pe-naos va hi-ni me ! »

II. — » Maout, dalc'h mad, eme ar Gall,
Maout ar Gô a ia da fall. »
« Maout, dalc'h mad, eme ar Gô,
Maout ar Gall d'id en em ro. »
Hag an eil ouz egile
An daou zot en em ganne.

III. — « Va maout, a lavar ar Gall,
A lakañ da vaout-te dall. »
« Va maout, a lavar ar Gô,
Da vaout d'id-te a dougno. »
Hag an daou ibanik kornek
A laka ar goad da redek.

IV. — « Alô ! maout, eme ar Gall,
Darc'ho d'in eun taolik all. »
« Va maout, a lavare ar Gô,
D'in eun taolik all darc'ho. »
Ag an daou geas penn-oc'h-penn
A daoliou korn en em zispenn.

V. — Dao ! pilet eo maout ar Gall,
Sao, adarre, kos tra fall. »
Dao ! diskaret maout ar Gô.
« Sao, pe me da dougofa. »
Hag an daou haour, adarre,
En em bistig a neve.

VI. — D'ar fin oll, maout ar Gallik
A guez d'an traon, maro-mik.
Ar Gall dilammet a fo
A dorr gouzoug maout ar Gô.
Ha setu 'r brezellourien
Ho daou var an douar ien !

VII. — « Brema, avad, eme ar Gô,
Eur c'hoari all a vezo.
« Sarr da veg, eme ar Gall,
Pe me rai d'id kement all. »
Hag etrez-o ho daou ractal
An taoliou torn da nijal.

VIII. — « Pak hema, ' lavar ar Gô :
Daoust ha c'hoas maout te grou-
« Pak hema, ' lavar ar Gall. [gô? »
Guel ha me c'hoari da fall. »
Hag evel var eun anne
Va daou zen a bigosse.

IX. — « Dal a zaou, eme ar Gô,
Va maout d'id ker a gousto !
« Dal a zaou, eme ar Gall,
Paea 'rin va dle d'eun all.
Hag evel gant morzoliou
En em vloansont a daoliou.

X. — Dao ! torret daou zant d'ar Gô,
Ar goad a red tro var dro.
Dao ! flastret e fri d'ar Gall,
Ar goad a red kement all.
Kerik mad eo bet koustet
An daou c'hloanek paour lazet.

XI. — Jobik ar Rous diwezet
Hen deuz dezho lavaret :
« Potred ! chomit didrabaz
» Pe me ia da c'hoari 'r vaz.
» Greomp friko gant ho maouted
» Ha bezomp oll mignoned. »